



Mirdi

Hentad dizoleiñ
an holl salioù



3600 a draezoù eus mare ar Paleolitik betek mare ar C'halianed-ha-Romaned zo diskouezet en armelioù-gwer ar mirdi. Met 350 000 a draezoù ouzhpenn zo miret e « sanailhoù » ar mirdi. Kavet int bet en 28 kumun eus kreisteiz ar Mor-Bihan hag en-dro da 200 monumant pe lec'h bennak. Abalamour d'an dastumad priziüs-se ez eo Mirdi Karnag ar c'hentañ mirdi er bed a-fet gouiziegezh war ar monumantoù meurvein. Sikour ac'hanomp da gavout penn d'hon zraoù !


Anv

Anv-bihan

Deiziad

1 Poltredoù

Setu amañ poltredoù an daou zen a zo bet diazezerien ar mirdi ! Klask pelec'h emaint er mirdi ha skriv an titouroù a vank amañ dindan.



Anv

Broadelezh



Anv

Deiziad ganedigezh

Deiziad marv

2 Er poltredoù-se emañ pep hini e-kichen ur monumant pe gant un draezenn a bouez eus mare ar Ragistor, kement ha diskouez int arkeologourien. Klask, er mirdi, un adsavadenn eus ar monumant-se pe un draezenn damheñvel ha skriv petra eo hag e peseurt kumun eo bet kavet.

Traezenn pe monumant

Kumun

3 Kae d'ober un dro er salioù. Petra a gaver en ur mirdi arkeologiezh ha Ragistor evel hon hini ?

☐ moulladurioù

☐ eskern

☐ traezoù hag ostilhoù

☐ taolennoù

☐ kirri kozh

☐ mekanikoù

☐ loened plouzet

☐ maketennoù

☐ pezhioù dilhad ha gwiskamantoù

☐ luc'hskeudennoù

☐ mozaikennoù

☐ elfennoù savouriezh

4

Traezoù hag ostilhoù aozet gant hon hendadoù da vare ar Ragistor zo en hor mirdi dreist-holl. Gant danvezioù disheñvel-mat an eil re diouzh ar re all o doa graet. Gant an traezoù-se e c'heller kompren gwelloc'h piv e oa ar baotred hag ar merc'hed-se.

Gant petra eo graet an traezoù diskouezet en adrañ ?

- | | |
|----------|----------|
| 1- | 5- |
| 2- | 6- |
| 3- | 7- |
| 4- | 8- |

5

Setu amañ 9 zraezenn a bouez.

Klask pelec'h emaint ha skriv : 1- Penaos int ; 2- Gant petra int graet ;
3- Pelec'h int bet kavet ; 4- Pegen kozh int.



- a
- 1-
 - 2-
 - 3-
 - 4-



- b
- 1-
 - 2-
 - 3-
 - 4-



- c
- 1-
 - 2-
 - 3-
 - 4-



- d
- 1-
 - 2-
 - 3-
 - 4-



- e
- 1-
 - 2-
 - 3-
 - 4-



- f
- 1-
 - 2-
 - 3-
 - 4-



- g
- 1-
 - 2-
 - 3-
 - 4-



- h
- 1-
 - 2-
 - 3-
 - 4-

- i
- 1-
 - 2-
 - 3-
 - 4-





Mirdi

Hentad dizoleiñ
an holl salioù

Fichenn ar respontoù

Evit ar skolaer pe an ambrouger



Respontoù hentad dizoleiñ an holl salioù - Mirdi

- 1 James Miln (1818-1881) - Zacharie Le Rouzic (1864-1939)
Gant James Miln, un den pinvidik ha gouizie-k-bras eus Bro-Skos, e oa bet savet dastumadoù ar mirdi. En en staliañ a reas e Karnag ha troet ma oa war an arkeologiezh e furchas e meur a lec'h. Da Zacharie Le Rouzic, ur paotr eus ar vro, e roas fred evit kaout skoazell en e enklaskoù. E 1881 ez eas James Miln d'an anaon e Glasgow ha legadiñ e holl zastumadoù da gêr Karnag. Evit diskouez anezho e voe lakaet sevel ur mirdi gant e vreur Robert. Ar ragistorour Zacharie Le Rouzic, mirour kentañ ar mirdi hag arbennigour korn-bro Karnag, a roas e zastumadoù d'ar gêr ivez. An ti-kêr, evit o zrugarekaat, a lakaas anv **Zacharie Le Rouzic** a-gevret gant hini James Miln d'ar mirdi. E 1978 e tivizas an ti-kêr staliañ ar mirdi er presbital kozh.
- 2 Bouc'hal levnet a-lorc'h gant jadeit (Karnag)
Maketenn eus ar Vaeneg gant Zacharie Le Rouzic (Karnag)
- 3 Traezoù, ostilhoù, binvioù, lestroù, elfennoù kinkladur, bloc'hadoù greunit, moulladurioù plastr, frammoù adsavet, taolennoù, luc'hskeudennoù, tresoù, maketennoù ha traoù all.
- 4 Hir eo ar roll, met e-mesk an danvezioù e kaver kregin, eskern loened pe tud, mein a bep seurt, strinkennoù, sileks benet, priaoù, brankoù kirvi, koad losket, greun losket, traezoù metal (aour). Gant al listenn-se e c'heller lakaat ar vugale da gompren petra eo ar roudoù arkeologel... N'eus chomet betek ennomp nemet an traezoù pe an ostilhoù graet gant danvezioù a bad... Pell zo eo bet dis ennet an traezoù, an dilhad hag ar binvioù graet gant danvezioù a ya da goll (lêr, gwiad, koad ha kement zo), met ur bern titouroù a laka da soñjal e oa eus an danvezioù-se er mare-se.
- 5 a) Bili kempennet o tont eus Sant Kloman (Paleolitik izelañ)
Bili kempennet bet kavet e Sant Kloman (Karnag), en ur c'hamp eus mare ar Paleolitik izelañ annezet gant tud Heidelberg (neuz-dremm europat an Homo Erectus). Unan eus al lec'hioù ragistorel koshañ eo e Breizh.
b) Adsavadenn eus bez H Tivieg - Sant-Pêr-Kiberen (Mezolitik)
Adsavadenn eus ur bez dizoloet e Tivieg (Sant-Pêr-Kiberen) ha deiziadet eus dibenn ar Mezolitik (e-tro 5500 bloaz a-raok hon oadvezh). Ar vaouez-se a oa unan eus ar chaseourien-kutuilhaerien diwezhañ en Europa, d'ar mare ma oa ar c'hounideien ha saverien loened kentañ o tont war wel. Ur prantad etre ar Paleolitik hag an Neolitik eo ar Mezolitik. Lec'hiennoù Tivieg hag Edig, ma oa bet kavet kalz bezioù, zo kinniget er mirdi.

c) **Tro-c'houzoug o tont eus Krugell Sant Mikael - Karnag** (kreiz an Neolitik, e-tro 4500 a-raok hon oadvezh)
Ur brageriz variskit a vro Spagn bet kavet e 1862 e kambr-vez Krugell Sant Mikael, ar c'hoshañ bez ramzel (30 000 m³) a vefe bet savet biskoazh war an tamm douar-mañ, 1300 bloaz a-raok piramidennoù kentañ Egipt. Un draezenn a-lorc'h eo hag a ziskouez e veze kaset ha degaset traezoù a bell vro hag e oa Karnag ur greizenn galloudus ha pinvidik en Europa e penn-kentañ ar 5^{vet} milved.

d) **Bouc'hal levnet - Krugell ar Seizh Sant - An Ardeven** (kreiz an Neolitik - e-tro 4 500 a-raok hon oadvezh)
Lavnenn brav-kaer ar vouc'hal levnet-mañ, gant meur a dal, ur c'hil strizh hag un dremm lemm, zo graet gant ur garregad glas-wer dalc'hus (omfakitit pe jadeit). Ur skouer vat eo eus an traoù a-loc'h a veze produet e korn-bro Karnag e-kreiz ar 5^{vet} milved a-raok hon oadvezh, gant maen dambrizius degaset eus pell (eus an Alpoù pe eus Iberia). Sanket e oa en douar pa oa bet kavet, he dremm war-zu an oabl. Kement-se a ziskouez e oa deuet an traoù-se, ouzhpenn o implij resis kentañ (diskar gwez), da vezañ traoù arouezel evit lidoù kañv. Ur bazenn hollbouezus eo bet marevezh an Neolitik en emdroadur Mab-den. Deuet eo an dud da vezañ divoneerien, da vevañ e-barzh gwir tiez, darn anezho bodet e « kêr »-ioù. Krog int da labourat an douar ha da sevel loened. Traoù nevez zo bet war an dachenn deknologel. Er sal eus ar mirdi gouestlet d'ar vuhez pemdeziek ez eus armelioù-gwer ma weler lerc'h-ouzh-lerc'h penaos e rae an dud evit : labourat an douar, sevel loened, ober priajoù, bemañ sileks, levnañ mein, ober ostilhoù eskern, gwiadilñ.

e) **Kib gant ur sichenn - Losker-frond - Enezennig ar Lannig - Arzhon-Rewiz** (Neolitik)
E-leizh a briajoù a oa bet dizoloet e penn-kentañ an 20^{vet} kantved gant Zacharie Le Rouzic, a oa e penn Mirdi ar Ragistor e Karnag da neuze, pa oa bet o furchal er Lannig (Arzhon-Rewiz) tro-dro d'an hantergelc'h mein-sav e stumm un houarn-marc'h. 520 pod kinklet seurt-se zo bet kavet war an enezennig didud-se e genoù ar Mor Bihan, a-dal da Gavrinniz. Hiziv an deiz e kav d'an arkeologourien e oant loskerioù-frond implijet evit lidoù el lec'h dibar-se.

f) **Maen-sav engravet eus alez toet ar Lufan - Krac'h** (Neolitik)
Ar maen-sav engravet-mañ zo bet kavet en alez toet kamm ar Lufan, e Krac'h. E-pad pell ez eus bet lavaret e oa aze skeudenn ur « morgazh », un doare diwezhat eus doueez skoedet ar Morbihan. Kalz furc'h eo an arkeologourien diwar vremañ hag anzav a reont o devez poan oc'h intent an engravadurioù-se dre ma n'eus ket skridoù. Gant ar moulladurioù zo bet graet eus lec'hioù engravet e meur a daol-vaen e weler eo liesseurt an taolennadurioù : idoloù, arouezioù, skeudennoù. Meur a zisplegadenn zo.

g) **Bouc'hal div zremm, bagheñvel - taol-vaen ar Mane Meur - Sant-Pêr-Kiberen** (Kalkolitik)
Kentistor a reer eus ar prantadoù etre an Neolitik hag an Istor. Ar prantad kentañ a vez graet Kalkolitik (Oadvezh ar c'houevr) anezhañ. Oadvezh an Arem hag Oadvezh an Houarn zo bet goude-se. Traezoù-skouer eus ar prantadoù-se zo diskouezet er mirdi : ostilhoù hag armoù e kouevr, begoù saezhoù tanav-tanav ha brec'hen noù gwaregerien, listri (kloc'hheñvel), bouc'hili morzhelloù bagheñvel, bouc'hili envez... .

h) **Goustilh en arem - krugell Kervelerin - Kleger** (kreiz Oadvezh an Arem)
Mestroniet e voe labour ar metal, ar c'houevr da gentañ ha neuze an arem, e-tro an 3^e milved a-raok hon oadvezh. Un tennad a bouez eo bet en istor an teknologiezhioù hag istor arzoù an tan. Adalek 600°C e c'heller poazhañ pri, met betek hogos 1300°C gwrez e ranker mont evit labourat an arem. Arem a reer dre gendeuziñ kouevr ha staen hag a zo darvezioù a gaver en Europa ar C'hornôg e stumm kailhoù hag a ranker lakaat da goazhañ a-raok gellout o implijout. Kement-se a dalvez e oa modoù ober luziet hag artizaned arbennik a vestronie rouedadoù pourveziñ pell. Un ekonomiezh vedel a oa o tiorren er c'houlz-se dija. Dre ma oa mestroniet hentoù ar staen hag ar c'houevr ez ae kevredigezhioù zo war binvidikaat ha douaret e veze o uhelidi e-barzh krugelloù bras-eston gant daspugnadoù kañv a-builh. Evit echuiñ eo dav lavaret eo abalamour da oksidatur ar c'houevr e weler un tamm merglenn glas-wer war hogos an holl draezoù arem a zo diskouezet er mirdi. E gwirionez e oa liv an aour war an traoù arem pa vezent nevez divoullet !

i) **Delwennig un ejen kavet e villa ar Bosennoù - Karnag** (marevezh galian-ha-roman)
Delwennig un ejen, en arem ha plom kendeuzet, bet kavet gant James Miln, diazeour ar mirdi, e villa ar Bosennoù, e Karnag, er bloavezhioù 1870. E-kichen maketennoù kozh eus pezhioù disheñvel ar villa-se (govel, kibeldi, templ, stal-poderezh...) ez eus lakaet traoù bet kavet enno. Arvezioù eus doare ar savadur zo kinniget : toenn, tommerezh kreiz, kinkladur.